

(263, suite)

## Complimand Tol.

Me o supli, compagnunvez da bresta din o silanq,  
 Evit ma parlantim breman en ho prezanq.  
 Gant-honor d'o yec'het me a deu da efan,  
 Hag a beurz ar Vreg-Yaouanq en ho trugarecan.  
 P'o c'heuz bet ar vadelez d'e bean assistet  
 En dever a hirie ebars en e heuret;  
 Hag evit oc'h oblija ec'h evin davantach  
 Da yec'het nep so roet gant Doue dei evit partach.  
 D'o yec'het ive, Greg-Yaouanq, eus a beurz ho pried;  
 Doue da rei dec'h ar c'hraç d'en em garout parfet,  
 Ha da rei dec'h er bed-man gement a souhetet,  
 Me a reget ma verq oc'h oll dezirion exoset.  
 Me a reget c'hoarz dec'h assistans euz Doue,  
 Evel quechal en eured Cana en Galile.  
 Me a ef d'o yec'het oll eus a greis va c'halon;  
 Doue da rei deomp oll e venediction.

(264)

Ne anseomp get ive an anaon desedet,  
 Tad, Mam, ha breur ha c'hoar, cont, moereberget.  
 P'o devoa bet ar soign, gentre m'oant en bue  
 Da zovetat da beb-hini ac'hanomp e zante.  
 Chomit, Compagnunvez, pebhini en e blas,  
 Evit caout ar vadelez da ariztan er gras.  
 P'on eus debret hag efet, trugarecaomp Doue  
 Da vea roet deomp-ni ouz hon nesesite.  
 Excus ta, Compagnunvez, a c'houlennan breman,  
 Rac aon n'am be get plijet da speret peb-unan.  
 Gouscoude e cred din nameus laret netra  
 Hag a choqfe nicun a gement zo aman.  
 Me a efe d'o yec'het oll a greis va c'halon,  
 Ouz o pedi da zebri ha da efa en ho tiserion.  
 Chomit ta pep-hini geit m'o er volonte;

210

Me non get deut amañ da rei da zep e conje .  
 Gras deomp oll da vea bepret en joaustet ;  
 Doue da gonservo qement so eus ma c'hlevet ;  
 Doue d'or c'honservo amañ var an douar ;  
 Gras deomp d'en eur velet eun devez bars er gloar .

(265)

### Discours erit eun Eured .

Salud d'ec'h , Compagnuney , gant quir humilité ,  
 Pa meus bet an ardison da zont en ho pete .  
 Perac tra n'am boa bet eloqans Ciceron ,  
 P'otramant ar furnez en devoa Salomon !  
 Perac n'am boa-me bet g'enou ha teod alaouret ,  
 Da barlant en ho prezans evel ma veritet !  
 Me zo deut amañ hirie gant ma c'hompanuney ,  
 Erit goulen diouzoc'h , m'ar be ho madelez ,  
 Eur recit mat benac ouz an deiz a hirie ,  
 C'houi oc'h-unan a ell accordi din qementse .  
 Tennet or boam d'ar sort , o clasq ar savanta ,  
 Allas ! ma zep digozet gant an ignoranta ;  
 Mes dre ho madelez , ho sqiant , ho prudans ,  
 Me o fed d'am excuzi demeus va ignorans .  
 Me a c'hoare ganen hirie evel gant ar stereden ,  
 Pa deu an eol da bara a gol e sclerijen ;  
 Hag a zo neun gad amañ evel en eur jardin  
 Guerniset a lore , a roz hag a durcantin .  
 Hag en e c'hreiz , a zo bet mag'et eur femelen  
 Brillantoc'h a ec'hunan erit ar gaera fleuren .  
 Me gare dont a ben da hallout e surpren ;  
 Mes va speret zo troublet , n'en don get vit compren .  
 Gant honor e saludan an oll gompagnuney ;  
 Peoc'h Doue d'ar re veo , ha d'an anaon silvidig'ez .

(266)

### Breman ec'hantre davit ar Plac'h er gambr .

Salud d'ec'h , diou verc'h-yaouanq , demeus a beurs Doue ,

(267) Me a zo deut d'o cavet en devez a hirie,  
 Evit gout diganech a c'houi zo presentet,  
 Da zont da efectui ar pey so prometet.  
 Deut eta da c'houl Benos eus ho Tad hag ho Mam,  
 Evit dre g'ementse bea dirac Doue divlam;  
 Rac dre e c'hourc'hennou en deus demp, ordrenet  
 Respecti dreist peb-hunan neb o deus hor ma'et.

Pa aruer en peñ an dôl.

Rac-se ta, Compagnonez, mar deuan d'oc'h areti,  
 Bezit ar vadelez da zont d'am excuzi.  
 Stouomp eta d'an daoulin da c'houlou euz Doue  
 Ma teuyo d'on asista en dever a hirie.

Breman e taouliner.

(268) Doue oll-buissant en en vel en douar,  
 M'am eus oc'h ofanset, me meus eur quir glac'har;  
 Setu me d'an douar diracoc'h prosternet,  
 Vit ma vo ho madelez accordin din eur reget.  
 Ho peños, ô va Doue! eo ar pey a c'houlennan,  
 Evit ho servicherez a zo daoulined amañ,  
 Evel goechal Sant-Yan, pa vadeas hon Talver,  
 A glêvas en en eur voez abeuz an Tad Eternel:  
 " Ennes evez va Mab an hini muian caret,  
 " Va c'hrag ha va beños a vo gantan bepret. [5]

Breman e sao hag e tistro ous ar g'erent.

Goude beza goulennet Benediction Doue,  
 E falfe din caout hini brema e zud ive:

212

Setu ho Merc'h d'ar douar diracoc'h prosternet,  
 O renta dec'h-u homach evel ma zeo dleet;  
 Goude beños ar Verc'hez, qent mont er mès anty  
 E c'houlter a vouir galon diganeoc'h hoc'h hini.  
 Or enta . . . . . ha c'houi dē a voar galon,  
 Da rei gant ho pug'el ho Penediction.

Evit ar Vorn.

Ha c'houi, Mam garantezus, p'ini n'eus e mag'et,  
 Deut eur mennat a c'houlennan, n'ar Doue n'em refuset qst,  
 Ho pennos a houlennan diganeoc'h evit ho pug'el,  
 Evel ma eure quechal ar Patriarchet santel.  
 Bennos breudeur ha c'hoarezet ive pareillamant,  
 Hini paeron, maeronez, m'ar maint amañ prezant,  
 Hini ar Zent, ar Klerz, hag hini ar Gompagnonez,  
 O deus grêt dei ar honor d'e arzista en e devez.  
 Ha breman demp en hano a Zoue;  
 Goude renta ar homach, obliget omp da ze.

(269)

Breman e ve laret eur Batez hag eur De profundis.

Breman e lavarer eur Ave hag e saver.

Savit ta, merc'h-yaouanq, da zont da dy Doue,  
 Evit efectui en antier ho promesse,  
 Da gaout fidelite bete fin ho pue,  
 Ha goude d'em velet en barados Doue.

fin

(Vol. II, p. 263-269.)